

SESSION 2019

**CONCOURS EXTERNE / SECOND CONCOURS INTERNE
DE RECRUTEMENT DE PROFESSEURS DES ÉCOLES
SPÉCIAL LANGUES RÉGIONALES**

BRETON

ÉPREUVE ÉCRITE D'ADMISSIBILITÉ

L'usage de tout ouvrage de référence, de tout dictionnaire et de tout matériel électronique est rigoureusement interdit.

Durée de l'épreuve : 3 heures

Coefficient : 2

Taol-kaer e Toulzac'h

Antronoz e oa izel an heol pa gerzhemp, Per ar Boutoun ha me, war-du kanienn* Toulzac'h [...]. Gant hor saro du war hor c'hein, ur penn-bazh en un dorn hag ul letern en all, e c'hellemp bezañ kemeret evit paotred yaouank o vont da foar Montroulez. Marvailh 'oa ganeomp evel etre daou vignon kozh n'eus netra kuzh etrezo an eil d'egile. Un dudi 'oa bale
5 d'ar c'houlz-se ; deuet e oa an distan gant an abardaez, ha diouzh kostez ar mor e c'hweze ur mouch avel a oa gras he santout war an dremm. War ar c'hleuzioù al lann a grene an disterañ, ar yeot a heje o begoù goustadik ; en tu all, liv arc'hantet pe alaouret ar soul gwinizh ha kerc'h, pe liv rouz an douar nevez troet.

Bremañ e tiskennemp war-du Toulzac'h. Du-hont e-touez ur bochad gwez, siminalioù
10 Koatilezeg a zivodege e-kreiz tachadoù gwenn ha glas-du a verke an tiez hag ar bernioù kolo ; a-gleiz Trebompe a save en tu all d'ur waremm vras a lann hag ur vrug, reier gwenn strewet enni heñvel ouzh deñved gourvezet. Dre ma 'z aemp, ar C'hoad-pin a winte begoù e wez uhel hag a ziskenne gant an dorgenn evel ma 'n divije bet c'hoant da flastrañ dindano Mintrig, puchet en traoñ war ar richer, un troad e pep tu. Tostoc'h deomp ar Pradoù rannet gant neud
15 orjal hag an dour a verk harzoù teir farrez : Sant-Tegoneg, Pleiber-Krist ha Sant-Seo. Ar saouteier a beure a-zevri, kuzhet ma oa an heol gant an dorgenn, ha tec'het ar c'helien. Ar baotred-saout a c'hoarie, bodet holl en ur prad. [...]

Nebeut ha nebeut e teue an noz. Ar steredenn gentañ a lugerne en oabl, goloet a vare da vare gant ur goumoulenn wenn bennak. Ar vesaerien a zastume o loened ; ur strakadenn fouet
20 a lakae ar re lontek da hastañ a-fo kemeret o genaouegad diwezhañ. Rumm dre rumm e tremenjont en hent don, reut o c'horf ha pounner o zezioù.

Ni 'oa aet da guzhat en ur waremm war ribl an hent. Azezet, pe gentoc'h gourvezet e oamp war ar brug, o sachañ pep hini war e gorniad, da c'hortoz ma vije du an noz ha tud o tremen o-unanik. Pep trouz a dave tro-war-dro ; ur pennadik e klevjomp mouezh ar portezet o
25 kanañ ; echu gantañ ur poz, ez ehane da selaou, evit doare, e « la li la leno ». Ar son ac'h ehanas, ar c'harr ne wigouras ket ken ; peoc'h an noz 'oa en em ledet war an douar. An deñvalijenn a devae gant ar c'houmoul du a zerede diwar lein ar menezioù ; o zachad a c'hounezas war an tachad glas hag a c'holoas an neñv betek ar C'huzh-heol. Du-pod e oa : un amzer dispar d'an taolioù eus ar seurt e oamp o vont da ober. Setu end-eeun ur gouloù o
30 tiskenn du-hont rag-eeun da Goatilezeg ur paotr yaouank bennak hag a sut dre ma teu.

- Deomp-ni da c'hoari bremañ. Sut ! Sut, paotr mat, ma n'ec'h eus ket aon rak ar C'hilher.

Raktal me 'enaouas va letern, ha Per a yeas da guzhat a-drek ur vodenn lann war ribl an hent. Per a dlee lazhañ e c'houlou d'ar suter, me gant va hini a dlee e goll er gwaremmeier ken en divije skañvaet un tammig e yalc'h : lod ar foar, na petra 'ta ! Trouz ar botoù-lêr a dosta ;
35 emañ o tremen e-biou da Ber... Vlan ! Gouloù ebet ken. Mat ! Per, skoet mat ! Ar c'hwiteller a dle bezañ spontet ; va zro bremañ... Petra zo ? Petra zo 'ta ? Klevet a ran taolioù o kouezhañ evel grizilh e miz Meurzh. Daoust ha Per e vije o tañva bazh egile ? Grik ebet ; trouz ebet mui. Eo ! Trouz ar botoù-lêr war vein an hent, hag ar sutell o vont en-dro gwasoc'h eget biskoazh. Botoù ha c'hwitell a chom a-sav hag an den a c'hrozmol :

40 - An diaoul e-unan ne welfe ket e hent ; ha torret va letern ; da vihanañ hennezh all a zo torret ivez garenn e gorn-butun... Sell ! Ur gouloù ! Ur gouloù e traoñ Toulzac'h, che ! Koulskoude n'eo ket ur preñv-glas eo. Deomp da welet atav !

Diwar Jakez Kerrien, *Ar Roc'h Toull*
2000 [1926], Editions Armorica

* traoñienn

I. Goulennoù : respontit gant frazennoù

- 1- Eus peseurt korn-bro eus Breizh zo kaoz amañ ? Kemerit harp war an destenn evit arguziñ.
1 poent
 - 2- Da beseurt koulz eus ar bloaz e tremen an istor ? Displegit.
1,5 poent
 - 3- Piv eo an daneveller hag e gamarad ? Taolennit anezho.
2 boent
 - 4- a. Petra emañ an daneveller hag e gamarad e soñj ober ?
1 poent
b. Penaos e vo graet ganto ?
1 poent
 - 5- Displegit : « Du-pod e oa : un amzer dispar d'an taolioù eus ar seurt e oamp o vont d'ober. »
(I. 28-29)
1,5 poent
 - 6- Piv eo an den a zo o tont daveto ? Taolennit anezhañ.
1,5 poent
 - 7- Petra a c'hoarvez gant an daneveller hag e gamarad e fin an istor ? Ha deuet int a-benn eus o zaol ?
2 boent
 - 8- Diskouezit e teskriv an daneveller e endro gant e bemp skiant. Roit tri skouer.
1,5 poent
 - 9- Displegit ar fent a zo en destenn.
2 boent
- ## II. Troidigezh
- Troit e galleg adalek al linenn 1 : « Antronoz e oa izel an heol... » betek al linenn 6 : « ... a oa gras he santout war an dremm. »
5 poent